

Átha Cliath, 1974

Echu koan, distaliet an daol. Emañ va gwreg Katrina o tegas kafe deomp. Deomp, da lâret eo ni hag ur c'houblad all, tud a-oad ganeomp – en tu all da dri-ugent vloaz –, tud a-live sokial ganeomp – bourc'hizien vihan.

Un nozvezh klouar hag habask a viz Gwengolo eo, un drugar. Dre brenester ledan digor-frank hol lojeiz e vez gwelet gouleier ar porzh o lugerniñ en traoñ, ha re ledenez Plougastell en tu all d'al lenn-vor. Ur vagig dre lien a dremen didrouz hebiou ar chaoser, buket war ar porzhig bigi-bale e-traoñ ar C'hastell. Eus ar vali d'Ajot e teu kriadennoù mouget bugale ha boubou tud o pourmen e klouarded an dilost-hañv.

Da-heul ar c'hafe, hervez kustum, e vez diskennet ur banne whisky d'hon ostizien. Dour ar vuhez alaouret blaz an taouarc'h gantañ, evel zo dleet evit Bretoned desket en o aez.

Hanter voredet gant ar meuz brokus ha boeson an abardaez e sellan ouzh va c'henseurted – va mignoned ? –, ken habaskaet all anezho, warno liv an disoursi tud chomet yac'h-rezonapl ha gouest da dañva plijadurioù bihan ar vuhez.

— Ha perak 'ta *single malt* Skos atav ? Hini Iwerzhon n'eo ket fall ivez, eme Laura Krenn. Sell, gant hor mab Nikolaz 'oamp aet da weladenniñ strilherezh Tullamore en hañv. Se 'ni 'oa, Herve, neketa ? emezi d'he gwaz.

Hep gortoz e respont e kendalc'h :

— Ya, hennezh zo e Dulenn bremañ, c'hwi 'oar. O labourat evit Microsoft abaoe bloaz. En em blijout a ra hardizh avat. Met te, Kristof, n'out ket bet o chom duhont 'pad ur reuziad mat, pell a-walc'h zo ?

Ur wech lañset Laura gaezh, a ouzomp holl, n'eus ket tu da herzel anezhi...

— N'ouzon ket penaos e oa kêr Dulenn d'an ampoent avat, pas kalz a dra da welet gant ar gêr vras virvidik a-vremañ, ha kalz marc'hadmatoc'h ar vuhez d'an ampoent, 'm eus aon, emezi en ur sklokat. Peur e oa dija ? N'eo ket d'ar poent ma veze reuz spontus gant an Norzh ?

Dulenn... Baile Átha Cliath...

Iskiset santadur... A-daol-trumm en em santan evel splujet e-barzh deroù unan eus ar skridoù-se eus an XIX^{vet} kantved, pa vez ur strolladig tud – gwazed oadet-mat peurvuiañ – en-dro d'un daol, debret ganto o c'hoan, erru poent ar segalennoù hag ar *brandy*. Hag unan anezho da sevel, mont ouzh ar siminal, turiañ an etevioù ha lakaat ur c'hef war an tan a-raok adsevel difonn, risañ foñs e werennad cognac en ur sellet tro-dro dezhañ, ha komañs dibunañ un istor klevet gantañ pe c'hoarvezet dezhañ pell 'oa. Paouez a ra ur pennadig evit sellet ouzh dremmoù aketus e selaouerien sanket don en o c'hadorioù bourret. Un ehanig c'hoazh, amzer ur sachadenn war e segalenn dev : « E miz Genver 18... ec'h erruas un estrañjour e-kreiz an noz e kêr G... ».

Klozañ a ran va malvennoù, astenn va divrec'h ha riñsañ va c'horzailhenn...

*
* *

En nevezamzer 1974 e oan en em gavet e kêr-benn Iwerzhon d'un abardaez-noz. Dulenn... ur gêr 'm boa bet tro da lenn ha da glevet kement diwar he fenn.

O c'hoari biz-meud e Wexford e oan bet dastumet gant tri mañsoner war o hent d'ar gêr goude ur frapad labour, ha kaset ganto kerkent hag erruet da evañ banneoù bier du en unan eus lec'hioù istorel Dulenn, Mulligan's pub.

Ur pennad mat goude, badaouet un tamm ac'hanon, em boa gellet kavout bod en ur B&B laou nepell alese. Da c'hortoz gwelloc'h...

Tri devezh war-lerc'h 'm boa graet anaoudegezh gant Mrs Dolan. E oan o vont e-barzh ur stal butun-kazetennoù-ispisiri – evel ma oa kalz anezho e Iwerzhon d'an ampoent – pa 'm boa stoket outi o tont er-maez, ha lakaet he fanerad da strinkañ war al leur, strewet he rikoù un tamm partout. Gant ar vezh e oan aet da sikour anezhi da zastum he feadra : *Barry's tea*, *Jacob's digestive biscuits*, pakadoù 5 *Woodbines*, avaloù, malzennoù kerc'h ha me 'oar-me c'hoazh.

Dek munut war-lerc'h e oan o flapiñ ganti en he c'hegin dirak ur banne te, en he c'harter paour hag a zo bremañ “mondianaet”, aloubet gant tud ar mediaoù hag ar *voboed*.

Mrs Dolan a oa anezhi ur gwir Dulennadez teodet mat e-kreiz he brud, ur palto gloan hir tev en-dro d'he

c'horf postek, botchoù en he zreid, ur fichu war he blev bet melen.

Echu va banne te e ouien pep tra diwar-benn buhez Mrs Dolan hag hini he familh. He daou vab – Michael (Moïkel) ha Sean – a oa c'hoazh ba'r skol, emezi. Damaik e vefent aze. He gwaz, Eamon, ganet anezhañ e kontelezh Roscommon, a oa oc'h ober e ruilh, rak gward-noz e oa e ti Guinness, pourvezer labour pennañ ar gêr-benn... hag an enezenn a-bezh, moarvat. Ken habask ha tavedek an den ha ma oa tourterez hag helavar e wreg, emezi en ur ziroll da c'hoarzhin.

Ne voen ket pell ivez o klevet diwar-benn he zamm *business* war bevennoù al lezenn. Pa glevas e oan o klask lojeiz e tanas ur Woodbine all, tapout krog em brec'h ha kas ac'hanon er porzh, a lakae da soñjal e tiez 'm boa bet digarez da welet en Afrika : mogerioù brikennoù tro-war-dro, un toullad barakennoù-santier er foñs, un tamm logell stok outo, a dalveze da brivezioù evit an tiad a-bezh. Un dar simant bras evit kannañ an dilhad, beloioù, bitrakoù a bep seurt strewet amañ hag ahont.

Mont a rejomp betek unan eus lochoù ar foñs. Ar re-se, liv an dirapar hag an diskramailh ganto, a oa bet prenet ganti war-lerc'h ur santier bras er c'harter, emezi. Lodennet e oa bet pep barakenn evit ober div gambr vunut, a-boan plas enno evit ur gwele hag un daolig brall-divrall.

Daoust d'ar reuzeudik ma oa an arvest ne oa ket aze peadra da spontañ ar Breizhad diwar ar maez ac'hanon. Ha pa lâras din Mrs Dolan ar priz e voe sklaer din e tilojfen d'he falez kerkent hag antronoz.

— Ur Gall all zo o chom just e-kichen, emezi. 'Benn arc'hoazh 'po tro da welet anezhañ !



Pa erruis an endervezh war-lerc'h gant va zammig peadra e welis un den ur moue melen hir rodellek dezhañ o walc'hiñ e draoù ouzh dar ar porzh.

Eus ar gegin e voe klevet mouezh kreñv Mrs Dolan, raouliet gant ar miliadoù a Woodbines butunet ganti abaoe hec'h oad krennardez :

— Opala Johnny, erru da genvroad gall !

Ne soñj ket din he dije fiñvet kalz Mrs Dolan eus he c'harter genidik, nemet evit mont da Roscommon ur wech bennak da rentañ bizit da familh he gwaz, marteze. Nag he dije morse klevet anv eus Breizh. Gallaoued-tout e oamp eviti !

Treñ a reas ar paotr en ur lakaat e zorn dirak e zaoulagad, dallet ma oa gant an heol.

— *Salut*, emezañ. *Ça va avec toi ?*

Sufis e voe din klevet ar frazennig-se evit gouzout e oa dirazon ur Breton penn-kil-ha-troad. Ar pouez-mouezh ? 'Tu bennak e-trañ Kerne, a soñjis.

Gwisket e oa ar paotr gant ur roched lien gros mod tad-kozh, gant ur bragoù liv brik ruz eus ar seurt a vez douget gant pesketaerien hon aodoù, en e dreid sandalennoù lêr. Diskenn a rae e vlev puilh izeloc'h evit e zivskoaz. Marellet e oa e fas babig divarv gant pikoù-panez, togn un disterañ e oa e fri, ledan e c'henoù ha lufre zaoulagad glas-mor. Hemañ, sur-mat, a zle reiñ debron da vaouezed azy moumounañ anezhañ, a soñjis. Treut e gorf hag izel e vent, met pa sellis ouzh e zaouarn kaletaet hag ouzh e arvrec'hioù kigennek, ar re-mañ a oa re ul labourer.

Klevet a ris e oa Yannig Louboutin bidoc'hig ur

familh labourerien-douar eus kostez Brieg (Landudal pe Landudeg, atav e veskan an div-se... Landudal, a gav din). Dilezet en doa e vro c’hwec’h miz goude bezañ tapet e BEP amunuzer, abalamour ma ne felle ket dezhañ ober e goñje. Objektour e oa ar paotr. Kraouiet e vije bet anez da se. E Dulenn e oa en em gavet miz bennak ’oa.

Er sizunvezhioù da-heul e ris anaoudegezh donoc’h gant Yannig Louboutin. Deuet e oamp buan da vezañ kamaraded, en desped d’an disheñvel ma oamp. Ur paotr sioul hag hegarat a oa anezhañ, ur spered mennet start ivez, a zislavare e neuz krennard *babakool*. E bal a oa deskiñ saozneg propik, kavout buan labour war e vicher hag en em staliañ goude, un tu bennak er vro-mañ. Digoust e veve e ti Mrs Dolan, rak ampart ha dornet e oa, hag atav e veze tra-mañ-tra da gempenn pe da fichañ en-dro d’an tiegezh.

Estreget Yannig e veze herberc’het un toullad oristaled all en hor “lez a vurzhudoù” : Ian, ur Saoz hir ha treut evel ur peul, gant e bouez-mouezh cheuc’h Oxford a lakae an holl da c’hoarzhin ; Carmen, ur Golombianez du-bran he blev, aet un tamm war an oad, a oa deuet betek amañ da skrivañ ur romant par da re he c’henvroad Garcia Marquez, emezi ; Florin, ur Romaniad yaouank oc’h ober tro ar bed war e bouezig, a oa sot-nailh ar merc’hed gantañ ; Liam, lesanvet Kerrygold, a veve amañ diwar an eostad kanab gounezet gantañ en hañv en e vro... Ha kalz tremenidi all c’hoazh, ankoueet ganin o anvioù...

Pep hini ac’hanomp en em denne evit bevañ, mod pe vod, ha deomp-ni tud yaouank e oa digor-frank dirazomp plijadurioù ur gêr-gapital hag a oa war ar memes tro ur gêriadenn vras c’hwec’h ha degemerus. Aes e oa liammañ

darempredoù skañv gant Dulenniz, kozh pe yaouank, ken distagellet o zeodoù ha ken troet o speredoù war ar fent.

Ingal a-walc'h e vezemp o riboulat e puboù ar c'hreiz-kêr, MacDaid's, O'Donoghue's, Nesbitt's ha kalz reoù all c'hoazh. Ha lammat er bus daou estaj diwezhañ, alies-mat evit difoupañ en ur *party* bennak, pep a *6-pack* dindan e gazell. Ha kan, ha c'hoarzhadeg, ha muzik ar vro, a oa en e varr d'an ampoent.

Birvilh ar bloavezhioù 68 en doa degaset cheñchamantoù bras er vro ivez, ha gwanaet pouez an iliz katolik, war dachenn an darempredoù revel peurgetket. Daoust ma veze gwelet c'hoazh peorien o c'houlenn an aluzenn er straedoù ez ae an traoù war wellaat. Rummad niverus *baby boomers* ar vro a groge da soñjal e hentoù all estreget hini an harlu da Vro-Saoz pe d'ar Stadoù-Unanet. Ne oa ket anv c'hoazh eus enkadenn an eoul-maen nag eus prizioù sot evit en em lojañ, ha harp feal ar beorien, ar pintad Guinness, ne gouste d'an ampoent nemet ugent *penny*!

Ur baradoz neuze ? Ur vuhez laouen ha disoursi en ur gevredigezh pouez he hengoun dibar ha nerzh he yaouankiz ganti, o vont war hent ar frankiz hag ar vodernelezh ?

Hag ar stourm en Norzh, emezit-c'hwï ?

Daoust ma veze heuliet ganeomp an darvoudoù skrijus, ne seblante ket poblañs ar Su bezañ gwall nec'het gant planedenn o breudeur gatolik en hanternoz. Sinet e oa bet un emglev evit klask kempouezañ un tamm ar galloud etre an daou du en Norzh, pezh en doa lakaet lod da soñjal e vefe tu da lakaat termen d'ar brezel hirbadus ha lazhus-se. Koulskoude, ar Brotestanted an hini eo a

gase an troc'h eno, ha ne felle ket dezho e vefe cheñchet penn d'ar vazh. « *Not an Inch* » (meudad ebet) a oa gerstur al Lealourien, feal da gurunenn Bro-Saoz.

Ur bern traoù a oa e gor, ha prim a-walc'h e voe degaset deomp da soñj e oa brezel er vro.

E miz Mae e voe boulc'het gant Sindikad Labourerien an Ulster, harpet gant ar strolladoù armet lealour an taerañ-tout, un harz-labour hollek, hag a oa da lakaat prim ekonomiezh ar vro d'an traoñ ha da loc'hañ ur wagenn feulsterioù ha bombadegoù eus ar c'hrisañ.

Betek-henn e oa chomet an emgannoù taerañ en Norzh, ha ne oa ket c'hoarvezet nemeur a dra war dachenn ar Republik.

*
* *

D'ar 17 a viz Mae e oan aet d'ober un droiad e kreiz-kêr. Kalz a dud a oa war ar stradoù abalamour da harz-labour ar busoù. Treuzet 'm boa campus Trinity College evit diskenn etrezek Mirdi Broadel Iwerzhon a-raok distreiñ d'ar gêr war va zreid, dre ma oa kaer an amzer.

Pa 'n em gavis du-se e oa Mrs Dolan e toull he dor, strafuilhet-tout. Dont a reas davedon en ur leñvañ ha briata ac'hanon ouzh he bruched bagol :

— 'Peus ket klevet ar c'heleier ? 'Peus ket klevet, va faotrig kaezh ? Mantrus ! Spontus ! Biskoazh kemend-all !

Er-maez eus o zier e oa an holl amezeien. O paouez klevet ar c'heleier e oant : teir bombezenn a oa tarzhet er c'hreiz-kêr d'ar memes koulz, da bemp eur hanter, d'ar poent ma oa war ar stradoù ur mor a dud o tilezel

o lec'h-labour evit mont d'ar gêr. Div vombezenn e tu hanternoz ar stêr Liffey, e Parnell Street hag e Talbot Street, hag unan all er c'hreisteiz, e South Leinster Street. Hep na vefe bet roet kemennadenn ebet en a-raok. An holl anezho plantet e kirri laeret diouzh beure e Belfast, a voe klevet war-lerc'h.

South Leinster Street, a soñjis en ur grenañ : dre aze e oan tremenet, a-boan un eurvezh a-raok !

Den ne ouie pet a dud a oa bet lazhet : degadoù, a dra sur. Ha kantadoù a dud gloazet. Ne oa ket ret bezañ diouganer evit gouzout eus a-belec'h e teue an taolioù-se.

Skeudennoù skrijus a dremene war skramm gwenn ha du skinwel Mrs Dolan : ambulañsoù sac'het er monedone, mammoù o yudal, dismantroù, tan ha moged, tud mantret-naet pe o ouelañ, bugale vac'hagnet... Beuzet e oa servijoù an ospitalioù gant ar c'hloazidi hag ar c'horfoù marv a veze kaset ingal dezho.

A zo gwashoc'h, un tri c'hardeur bennak war-lerc'h e oa bet tarzhet ur vombezenn all e Monaghan, ur gêr war harzoù an hanternoz. Meur a zen c'hoazh a voe lazhet eno.

Abalamour da nerzh spontus an danvez-tarzh e oa bet ken dismantret ar c'horfoù ma ne oa ket tu da anavezout an dud. Un test en doa disklêriet war-lerc'h e oa ar morg evel ul lazhti, 'lec'h ma oant o klask lakaat asambles tammoù izili evit dont a-benn da adstummañ pezh a oa bet un den pe ur bugel leun a vuhez un eurvezh kent.

Gwashañ lazhadeg e istor hir *troubles* Iwerzhon e voe...

Chom a ris souchet em barakenn en nozvezh-se. En ti e-kichen e kleven an tiegezh Dolan hag un nebeud amezeien o komz a vouezh izel hag o tibunañ pedennoù.

N'em boa ket gwelet Yannig abaoe daou zevezh. Ne zeuas ket en-dro en noz-se...

Goude ur prantad hir en em rois d'ar c'housed. Ur c'houk bresk ha leun a hurlinkoù. O redek dre Stephen's Green e oan, o klask kelaouiñ an dud war un dañjer spontus ha ne oan ket evit lavaret dezho petra e oa. Erru e-kichen ar stank e welis un den o tostaat... Iskis-tre ha dispis e oa e neuz. Pa voe erru en va c'hichen e laoskis ur griadenn : Yannig an hini e oa, o tougen e benn en e zaouarn, evel Sant Denez, e voue alaouret kailharet gant e wad o ruzañ an douar...

Dihunet e voen mintin abred gant Mrs Dolan o hopal er porzh :

— Deus, Christy, deus buan ! Ur vaouez zo ouzh ar pellgomz ha ne gomprenan takenn deus ar pezh a lâr !

Redek a ris ken buan ha ma c'hellen met pa dapis krog er pellgomzer ne glevis nemet bip-bip an ardivink adskourret er penn all.

Tremen a ris un devezh laou o vrizhlenn levrioù bet boulc'het ganin a-raok, o treiñ-distreiñ etre ar varakenn hag ar porzh, o prenañ kazetennoù ha ne veze ket kalz a dra nevez da zeskiñ enno. Dizanv e oa bepred ar braz eus ar reuzeudi. A-benn fin an devezh e oa tost diviet va fakad *Golden Virginia*, faezh va c'horf ha stignet-spontus va nervennoù. Ha Yannig ne oa ket deuet en-dro c'hoazh...

Gouloù a oa e barakenn Liam. Koulz abafñ da vat, emezon, ha me mont da brenañ ur meudadig geot digantañ...

*

* *